




Amañ e teu pelerined Santez Anna d'ober Hent ar Groaz

Photo Jos LE DOARÉ, Châteaulin

Bleun-Brug

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.

Koumanant a enor : 600 lur.

Madoberour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, Treboul (Finistère).
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

LEVRIOU NEVEZ

AN HADER. M K 4, 3-9 ; L K 8, 5-8.

« An hader a yeas er-maez da hadañ. 4 Hag e-pad n'edo oc'h hadañ, e kouzhas greun war ribl an hent, ha laboused an neñv a zeuas hag o debras. 5 Greun all a gouezhas en ul lec'h meinok ne oa ket ennañ kuz a zouar ; hag e savjont kerkent dre ne oa ket a zouder douar ; 6 met, pa bignas an heol e voent devet hag evel n'o devoa ket a wrizioù, e sec'hjont. 7 Greun all a gouezhas e-mesk ar spenn hag ar spenn a saras hag o mougas. 8 Re all a gouezhas en douar mat hag e rojont frouezh, unan kant, un all tri-ugent, un all tregont. 9 Ra glerc'h an nep en deus diwskouarn. »

Tennet eo ar pennad aviel-se eus eul levr nevez-flamm : An *Aviel hervez Sant Mazhe*, gant an tad Medard, kapusin, ha Maodez Glanndour, embannet gant « Studi hag ober ».

Meur a Aviel a zo bet dija embannet e brezoneg. Met an holl levrioù-se, da vihana al levrioù katolik, a gemmesk skridou ar pevar avieler. Naoñlek kant vloaz eta, goude maro Hor Salver n'hon doa ket c'hoaz, nag Aviel Sant-Vaze, nag hini ebet eus an Avieloù all troet war eeun, e brezoneg, diwar ar Vamm-skrid. Mantrus eo kement-se. A drugarez da Vaodez Glanndour ha d'an Tad Medard, hon eus bremañ Aviel Sant-Vaze war eeun-diwar ar Vamm-skrid. Pep Breizad a lavaro bennoz Doue d'ezo. Met an doare gwella d'o zrugarekaat eo prena o levr.

Eul levr a dalvoudegez gant daou eus hor skrivagnerien walla.

Prenit holl : « AVIEL SANT MAZHE ».

Priz : 250 lur ; frejou kas : 30 lur.

Goulenn digant an Ao. beieg Floc'h, aumonier Pensionnat Saint-Pierre, Saint-Brieuc, C.C.P. Rennes 242-12.



DISTRO PASK

DISTRO Pask, e kerz hor bloaz, eo viktor an nevez amzer war ar goañv, trec'h ar vuhez war ar maro, an esperañs o tont adarre da leunia pep kalon.

An eil goude egile, hor parkeier hag hor prajou tommet gant bannoù klouar an heol a gemer bremañ o livioù skedus hag en em fich en o c'haera.

Gant an delioù hag ar bleunioù o tigeri, gant kan al laboused, eur mor a yaouankiz hag a c'hened eo a en em led a-dreuz d'hor mêzioù renevezet...

Pask a zo eun ehan madeleus en hor bloaz a labour evel eur skleraenn lugernus a-zioc'h oabl hor buhez, ken alies trubuilhet hag ankeniet.

Diskouez a ra splann d'eomp nerz burzudus ar vuhez, talvoudegez labour ha trevell an den. An douar-se hag a oa c'hoaz ken yen dec'h, an had-se hag a zeblante sec'h ha divuhez, gwelit pegen birvidik eo hirio ar vuhez enno.

Dirak burzud bras ar bed krouet o nevezi, bep bloaz, evit pourvei da vagedurez ar c'horfou, dirak splannder ar vuhez oc'h en em skigna, a bep tu, penaos ne zeufe ket kalon mab den da zigeri ive d'al levenez.

Ha koulskoude Levenez Pask evit ar c'hristen na pegement donnoc'h, ha c'houekoc'h n'eo ket ? Pask ha n'eo ket evitañ gouel ar gouelioù, gouel buhez e ene, gouel e feiz hag e holl gredennou ?

Evitañ Pask eo, e gwirionez, gouel ar bez goulo gouel ar vuhez trec'h d'ar maro, gouel ar C'hrist, e vestr karet, bet d'ezañ ar gounid war e enebourien, hag o c'hervel e vignoned da gaout perz gantañ en e vuhez padus.

Ya, kredi a ran Jezuz Krist, en deus gouzañvet dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro ha sebeliet... en trede deiz savet a varo da veo.

Abalamour m'eo savet beo da vintin Pask, goude m'eo bet dikennet e gorf er bez teñval, oun sur ez eo Doue, hag en dro drugarez evidoun, pec'her.

Abalamour m'eo savet a varo da veo, e c'hell va ene, maro gant ar pec'hed, as-veva adarre, ha dougen frouez evit ar vuhez da zont.

Abalamour m'eo savet Jezuz eus ar bez, leun a vuhez, e c'hortozan, me ive, an deiz ma savin gantañ d'ar vuhez gant ar re holl am eus karet.

Va c'horf, e unan, lakaet er vered, evel ar winizenn, taolet en douar da vrenia, dilezet gantañ pep semplesdurez, a zavo skedus evit beva eus eur vuhez nevez, eur vuhez ne echuo morse...

Tud gwasket ha brevet dindan ar zamm, savit ho penn ha kemerit kalon.

Evel ma tremen ar goañv, ar barrad a-dremeno. Ar c'houmoul a deuz en oabl met ar glaz a jom.

War-lerc'h gwener ar groaz e teu Sul lugernus Pask.

L. Bleunven.

PREZEGENN EURED

« Tremet 'ra pep tra
Nerz, madou, yec'hed
Yaouankiz ha gened
Tremen 'ra pep tra. »

En eur zigeri, en deiz all, leor ar c'hantikou brezonek, oun kousezet war ar son-se ken kaer ha ken gwirion.

Ya, tremen 'ra pep tra...
Skeudenn da vuhez
Eo ar vag a welez.
He roudou er mor
Zo kloz a-vec'h digor.

Memes an dervez-mañ a dremeno. Ar bleuniou, ar goulou, ar c'han, ar musik, an darempredou gant ho kerent, gant ho mignoned, plijaduriou, c'hoariou, an dervez-mañ. An holl draou-se a dremeno. Koulskoude an dervez-mañ, ne vo ket disoñjet ganeoc'h.

Eun dervez graet ennañ gant Doue, traou ken kaer en hoc'h ene.

Eun dervez, hag a zigor hent eur vuhez nevez ha dianavezet.

« Ar vuhez a zo berr, ret eo d'ezhi beza dispar », a lavare Guynemer.

— C'hoant bras ho peus ho taou e vefe leun ho puhez.

Hag en em c'houlenn a rit, e dounder ho kalonou : « Petra vo an ero nevez a vouldomp hirio ? »

— Petra vo ar roud a lezo hor bag war mor bras ar vuhez ?

— Petra vo an amzer da zont ?

Evit kaout eur respont vat d'ar goulennou-se, warzu p'ou mont nemet warzu Doue e-unan, o komz d'e grouadurien e levr sakr ar Skritur.

Digoromp eta ar Bibl santel, al lizer bras-se digaset gant hon Tad eus an Neñv d'e vugale, an dud, o veva war an douar, ha lennomp ar salm 127.

« Eürus ez oc'h c'houi hag ho peus aon, doujañs ha resped dirak an Aotrou Doue. C'houi hag a vale war e henthou. »

Rak en em vaga reot gant labour ho taouarn.

D'eooc'h e vo an eürusted hag ar binvidigez. »

Baleet ho peus war henthou Doue.

Baleit gwelloc'h c'hoaz !

« Bezit santel evel m'eo santel va Zad. »

An urz-se a zo roet an Aotrou Krist, d'an holl, memes d'an dud dimezet.

— Hent ar Baradoz, arabat hen lezel gant ar veleien, gant ar seurezed, gant an dud dizemez !

« Me eo an hent, eme ar C'hrist —

er maez eus an hent-se n'eus eürusted leun ebet da glask memes er vuhez-mañ. »

« Eürus ez oc'h c'houi hag a vale war e henthou. »

Rak c'houi en em vago gant labour ho taouarn. »

— En em vaget ho peus dija gant poan ho tivreec'h.

Evel ho tud n'ho peus ket bet aon rak ar c'hrogad pemdeziek.

Gwasket eo bet korf gant tommderiou pounner an hañv — gant aveliou rust ar goañv.

Treuzet oc'h bet alies gant ar glao yen.

N'ho peus ket anavezet an diskuiz.

N'ho peus debret nemet eur bara, hag eur bara re-sal alies gant ho c'hwezenn.

Labourerien douar, va breudeur mui a-karet, ho korf a zo brevet — ho taouarn a zo skarnet ; enor ha meuleudi deoc'h holl.

Deski a rit c'hoaz d'ar bed n'eo ket bet laket an den war an douar-mañ evit diskuiza ha koll e amzer.

Ya, warc'hoaz, evel ma lavar ar Salm, c'houi en em vago gant labour ho taouarn. Hag eürus e vezoc'h.

Eürus ma ne labourit ket hepen evit rastellat arc'hant.

Eürus ma fell deoc'h kaeraat ar maeziou krouet gant Doue.

Eürus ma fell deoc'h beza talvoudus d'an den ho preur.

Eürus ma poagnit e stad a c'hras — ma kinnigat bemdez ho skuisder da Zoue.

Eürus ma rit eus al labour a gargo ho puhez, eur benveg dispar evit savetei hoc'h ene hag eneo ar re all.

« Da wreg, eme ar salm, a vo en da di, evel eur wezenn pleget he skourrou gant he frouez. »

Da vugale a vo evel plant yaouank en dro d'an daol. »

Pebez taolenn gaer !

Pebez taolenn gaer leun a beoc'h, leun a urz, livet gant ar Spered Santel e-unan.

Taolenn ar familh niverus.

E-lec'h ma tev bepred flamm-tan ar garantez, eur garantez kreñv evel ar maro.

E-lec'h ma klask pep unan en em rei d'egile.

En em zifoñjal evit ar re all — beva an eil egile.

Laza e dechou fall abalamour d'ar re all.

En em ober an eil diouz egile.

Servija e-lec'h beza servijet.

Rei plijadur e-lec'h dastum plijadur.

— Pep unan a glask lakaat ar familh a bez da bignat, da wellaat, d'en em santelaat.

Eun ene hag a bign, a laka ar bed a bez da bignat gantañ.

Kement-se a zo gwir dreist-holl evit eun tiegez.

Eul lamm war araok graet gant unan a zo eul lamm war araok graet gant an holl —

Eur paz war e-giz graet gant unan, a zo eur paz war e-giz graet gant an holl.

Diwallit da zont a-dreñv abalamour d'ho vugale —

Ho vugale a sello start ouzoc'h azalek an oad an tenera.

Ho vugale a gredo er pez a rit ha nann er pez a lavarit.

Ho vugale a vezo savet ganeoc'h — savet betek an den — savet betek Doue — pe diskaret ganeoc'h.

Ho vugale a dle kaout istim evidoc'h —

Diès eo karout eun den hag a zo leun a blegou fall.

Grit ma vo aes ho karout — lakaat fizians ennoc'h.

Kerent gant plegou mat a zo kerent istimet — ha kerent istimet a zo kerent karet.

— Bezit skoueriou beo.

Met evit beza skoueriou beo e rankit beza eun Aviel beo e iliz vihan ho ti.

Ha beza eun Aviel beo a zo karout — karout Doue — karout ar re all.

— Eun tiegez istribilh ennañ ar groaz n'eo ket kristen ma n'eo ket tommet ha sklerijennet e oaled gant tan ar garantez ;

ma ne had ket founnus, ar priedou, joa ha levenez e kalon an eil egile ;

ma ne garont ket ha ma ne vagont ket, dreist pep tra, eneo o vugale, eneo beo e-lec'h ma vev an Doue a garantez, Tad, Mab, ha Spered Glan ;

ma ne zigoront ket dor an ti d'ar re all, daoubleget ma z'int war o eürusted d'ezo o unan.

— Met evit derc'hel beo, buhezekaad, kreski an tan-se,

Evit mireut outañ da vervel, da glouaraat, da goll e nerz,

Arabat pellaat diouz an tantad, an Doue a Garantez hag e Vab Jezuz-Krist —

An hini en deus lavaret :

« Deuet oun da zegas an tan war an douar ha n'am eus ket c'hoant nemet ma teufe »

An tan-se emichañs a zevo war oaled ho ti :

— Ret eo evit kaout warnañ bennoziou an Neñv.

« Evel-se, eme c'hoaz ar salm, e vezo benniget ar re a gar an aotrou. »

Doue ho pennigo — hag eürus a vezoc'h penn da benn ho puhez.

Eürus ma lakit ar sakramant a zo ennoc'h da zougenn frouez.

Sakramant ar Briedelez, ne roit ket anezañ en eil d'egile evit eun dervez hepen.

Ar sakramant-se — eur sakramant bras eme Sant Pael — a-jem warnoc'h —

Abalamour d'ar sakramant-se — graet gant ho « ya » deoc'h ho taou,

C'houi a roio hep ehan, an eil d'egile, tenzoriou ar Bed all ;

C'houi a roio, hep paouez, an eil d'egile, sikouriou a nerz, sikouriou a sklerijenn,

Eus feunteun ar sakramant, c'houi a resevo ar grasou-stad, ar grasou-micher, ret, dreist holl, evit rei deskadurez d'ar vugale.

Sevel bugale; Pebez micher gaer ha pouezus!

Eur vicher ha ne vez ket desket kals koulskoude.

Klask a reoc'h beza dispar er vicher-se

Araok pep tra, al labour-se!

Hag amañ o lavarin deoc'h gant holl nerz va c'halon:


« Grit eus ho pugale, bugale hag a vev gant Doue, gant Hor Salver Jezuz-Krist, gant ar Sent, azalek o bloaveziou kenta.

Bugale, hag a anavezo, a garo ar Bibl Santel —

A dostaio gant doujañs, gant resped, ouz Doue Santel ha galloudus an Testament nevez.

Bugale hag o raio o zud vras nann eus rederien an « Tour de France », met eus Tud vras istor an Iliz hag istor ar bed: ar Sent —

Re a vugale a zo hirio goull o spered, klañv o ene — Beuzet int er gêr hag ar skol en eun aer dizoue —



Koulskoude ma ne roit ket Doue d'ho pugale n'ho peus roet d'ezo netra.

Na zisonjit ket ken-nebeut e red en ho kwazied gwad eur ouenn — eur ouenn disprizet alies gant ar re all ha disprizet gwasoc'h c'hoaz ganti he-unañ.

Pobl koz bepred yaouank ar Vretoned.

Ret e vo lavarout d'ho pugale ez int Bretoned —

Lavarout d'ezo o deus eur vro gaer a dle beza karet: Breiz, bro ar Sent, hag he deus c'hoaz eun dra bennak da lavarout d'ar bed.

Chom hep laza ar brezoneg war o muzellou yaouank.

Feiz ha Breiz: setu diou garantez hag a rankit gwrizienna doun e kalon ho pugale, hag en ho kalon deoc'h c'houi da genta.

Evit echui en eur gemerout komzou diweza ar salm 127 e lavaran d'eo'h en ano an Iliz Santel hor Mamm:

« Ra welot bugale ho [pugale]

Ha ra vo ar peoc'h [war ho tiegez.] »

Y. T.

Evit diroufenna ho tal

PERAK OUN ME CHOMET PAOTR YAOUANK

GOUZOUT a rit holl a oan o vont da zimezi. An Aotrou Person en deus hel lavaret d'an dud, disul, eus lein ar gador, ha ma karje hen beza serret e c'henou, den ebet n'en dije gouezet netra...

Met bremañ e krog an archerien en afer... Hola! Ne fell d'in a briz ebet! Ret eo d'in konta d'eo'h va istor... Selaouit mat.

En deiz all e lavaren ennoun va-unan: « Ma! ret eo d'in evelkent kaout paperou evit va eured. »

Ha me da Lanuon, rak eno emañ danvez va fried gant he zud; oh! tud pinvidik, tud a-zoare. Hola! hola! Emaint holl o labourat war ar pluñv; va zad-kaer a zo skrivagner; va mamm-gaer a ra dilhad gwele pluñv; va dousig koant a ra tokou gant pluñv evit ar merc'hed.

Adalek ma oan e Lanuon, me d'an ti-kêr, pe d'ar « mairie », ma karit; oh! eur c'haer a di, koant, brao, kaer, dous, mignon.

Ne lavarin ket kemend-all avat eus ar re a zo o labourat ennañ; pebez tud dichek!

.....

Pa zigouezis e toull an nor, me da c'houlenn ar porzier. Ne oa ket war-dro, met eur pezh maouez a zeuas da zigeri an nor.

— « Petra emao'h o klask? emezi, divergont.

— O klask paperou evit va eured, a respontis.

N'eo ket diaes, emezi. Kemerit an ale, aze, war-eeun; troit a-zehou, a-gleiz, a-gleiz hag a-zehou, hag eno, e penn an ale, e kavoc'h.

— Mat eo, a lavaris gant eur mousc'hoarz, ha me en ale war-eeun, evel m'am dije komprenet. »

.....

Kenta draf (guichet) en em gavas dirazoun, me da lavarout.

« Pardon, Aotrou! Pardon, Monsieur! »

Ar paotr ne rannas ger ebet.

« Bouzar eo marteze », a sonjis. — Ha me neuze da sevel kreñv va mouez:

— « Alo, Kouer!

— Na griit ket evel-se; c'houi eo, emezañ...

— Ya, me eo.

— Her gouzout a rit, ne da ket mat an traou.

— Petra? Penaos? Ne da ket mat an traou?

— Ya, klemm a ra an amezeien.

— Me n'em eus afer ebet gant an amezeien.

— N'eus forz, war geraat ez a an amann.

— O! Ha neuze?

— Met evit petra an diaoul out deuet amañ? Evit petra?

— Da c'houlenn paperou evit va eured.

— Ac'hanta! Patatezenn, hag e c'houlennez kement-se er « Bureau des Insalubrités Publiques »... kerz da bourmen! »

.....

Ha me d'an eil draf. A-raok ma c'hellis digeri va genou, ar paotr da c'houlenn ouzin.

« Peseurt « Classe » ac'h eus c'hoant da gaout?

— N'hon eus ket en em glevet c'hoaz war gement-se.

— Ha lakaet e vezo palennou war an nor ?
 — Petra ? palennou ?
 — E peseurt bered e vezo interes ?
 — Ba ! ne doun ket deuet amañ evit an interamant, deuet oun da c'houlenn paperou evit va eured.
 — O ! Genaouek ! emezañ, hag e teuez d'ar « Bureau des Pompes Funèbres » da c'houlenn paperou dimezi ; tenn da skasou ganit ; a-walc'h out bet gwelet. Alo ! oust. »

.....

Ha me d'an trede draf. Merket e oa a-us : « Etat-Civil ».
 « Mat-tre, a sonjis, amañ am bezo va faperou. »
 « N'eus nemedoc'h ?

— Nann.
 — N'hoc'h eus test ebet ?
 — Nann, hirio, n'em eus hini ebet.
 — Grit ho « teclarasion ».
 — Graet em eus anezi, pell 'zo.
 — Grit anezi a-nevez, m'hoc'h eus c'hoant e vefe merket.
 — Mat, ober a rin.
 — Eur plac'h eo ?
 — Ya, evel just.
 — Ha mirout a reoc'h anezi er gêr, pe kâs a reoc'h anezi da vaga ?
 — O ! Eur pennad amzer e virin anezi ; ha da c'houde, ma ne da ket mat an traou, e kâsin anezi da vaga.
 — C'houi eo an tad ?
 — Ne doun nemet danvez he fried, hag oun deuet da c'houlenn paperou evit va eured. »
 Neuze, ar paotr en e sav, sellou du en e benn !
 « Amañ emañ ar « Bureau des naissances », emezan ; amañ e teuer atao goude an eured, ha morse a-raok. Ha kollet eo ho penn ganeoc'h !
 — Mat eo, mat eo, ne ouien ket. »

.....

Ha me erfin da benn an ale ; hag e welis a-us d'eun nor « Salle de mariages », amañ da vihana a sonjis, ne vezin ket kaset kuit, ha ne rin ket eun dro c'houllo.


Hanter-digoret am boa an nor, hag e welis eur vandennad paotred yaouank, lod gwisket, lod all diwisket evel hon tad kenta Adam, en o mesk eur pikol archer, pe, ma karit, eur « gendarme », eur pezh korn butun gantañ en e c'henou :

« Erru e oac'h, dilerc'her ? emezañ.
 — O, n'eus tan-gwall ebet e neblec'h. Amzer 'zo ! Amzer 'zo !
 — « Alo ! oust, déshabillez-vous, passez la visite comme tout le monde. »
 — O ! Evidoun-me, n'em eus ezomm ebet eus kemend-all a chichi.
 — D'ober petra 'ta out deuet amañ ?
 — Da c'houlenn peparou evit va eured.
 — Hag e teuez da astenn da fri amañ, genaouek ? « Allez, oust, rompez » !
 — « Rompez ! rompez » ? — ret eo d'in « rompre », terri ? Ha koulskoude Philistin ha me en em anaveze abaoe, pell-zo !
 — « Rompez, vous dis-je, ou je vous colle 15 jours » !
 « Rompez » en deus lavaret..., ma, ret eo senti..., ha me da di Philistin da lavarout d'ezi ne felle ket d'in mont hiroc'h.


.....

Setu aze, va zud kêz, perak oun chomet paotr yaouank.

F. Ropars, Kure Plistin-an-Traez.



GWASOCH EGET MERVEL !



(Al lizer-mañ, tennet eus « l'ECHO DE LA LIBERTÉ » a zo bet skrivet gant eul leanez polonad prizonierez e kampou ar Russi. Diskouez a ra d'eomp pegen izel e kouez eur vro pa voug en den pep feiz kristen.)

TADOU KARET,

Erfin, tro a gavan da skriva d'eoc'h eur gerig. Daoust, avat ha mont a raio al lizer-mañ betek ennoc'h ! keit-all 'zo abaoe m'omp bet treinet e Bro-Russi ! Daoust ha n'hoc'h eus ket bet santet meur a wech hon anken hag hon droug-hirnez o vont betek ennoc'h ? Pet kwech e krian : arabat d'eoc'h hon ankounac'haat ! Pedit evidomp ! Skrijus eo ar pezh hon eus amañ da c'houzañv !

Bez ez eus ganeomp amañ wardro 1.500 leanez (seurez). Evel loened omp laketa ganto ; a daoliou skourjez e vez graet d'eomp labourat. Maletirusoc'h eo hor stad eget anevaled-mut, rak den ebet ne ra forz ac'hanomp. Mar domp skuiz-divi, ha ma kouezomp maro, ma vez skoet warnomp betek mervel, den ebet n'eo chalet ganeomp. Hep ger ebet hor c'halon rannet, digalonet, abafet, mont a reomp d'hon labour evel tud vezo. Ha ma ne da ket al labour buan a-walc'h endro, mar deus imor fall er gardian, e sko warnomp a daoliou fouet.

Laket omp bet da genta, da sevel eur pont war an « Dnieper ». Labour kalet zoken evit gwazed ! Dleet e oa d'eomp treina treustou houarn, ha treuzi ganto ar ster-vras. Ar re a goueze a sante raktal ar skourjez o koueza warno. Ma ne savent ket, a daoliou treid eo e vezent stlapet en dour. Na spontusad derveziou !

E-giz boued, ne veze roet d'eomp nemet eun tamm bara louz, hag eur souben sklêr. Kalz ac'hanomp a zo mervet, ha ni hon eus avi outo. Bremañ emaeomp o labourat en eur vengleuz kouevr.

A-grenn omp dilezet gant an holl. N'eus na sul na gouel evidomp. Derveziou hir ha trist hepken, leun a labour, a naon hag a daoliou ; eur paourkêz barakeñ yen, gweleou heugus enni, brein gant al lorgnez hag al loustoni. War hor c'hein n'eus nemet truilhou, ha kaer hon eus ne da ket an naon-du diwarnomp. Ne ket tud omp ken !

A ! Paour-kêz tadou ! ma ouijec'h pegen kalet eo hor buhez, ha pegen skrijus hor mizer ! Ar pezh a c'hellomp a reomp evit mirout da goll fiziañs e Doue ! Hep paouez eo e lavaromp : « Kredi a ran ! esperi a ran ! » Evit hon ene, avat, n'eus nemet teñvalijenn du-pod. Pedenn ebet evit hor c'hennerza. Daou vloaz 'zo n'hon eus ket komuniet. Emaomp dilezet hag ankounac'haet gant an holl !

Ma n'eo ket spontus beza hep esperañs, hep steredenn ebet da welout ! Kompren a rit bremañ perak omp skoet gant an douetañs. Perak 'ta en deus Doue permetet kemend-all ? Perak kemend-all a vizer ! Pegeit c'hoaz a pado hor poaniou ? Flemmet omp gant an dizesper !

Mammou kêz, ha gouest oc'h da gompren kemend-all ? Den ebet d'hor sikour ! N'hellomp ket padout ! kement-se a zo dreist hon nerz d'eomp. Daoust da-se, en em erbedi a reomp ouz Doue, en em goll a fell d'eomp-en e Brovidañs.

En eur gêr, pep hini ac'hanomp a zoug ar groaz war e galon, hag en hon dienez pep hini ac'hanomp a chom stag ouz ar groaz, stag outi betek ar maro.

Koulskoude, pedit evidomp ! Pedit ! Pedit ! Ar pezh hon eus da c'houzañv, deiz ha noz, n'hell ket beza lavaret.

En despet da bep tra, kredi a reomp en deus Doue permetet an dra-mañ evit brasa mad hon eneou.

N'hellan ket lavaret d'eo'h pep tra. Nag omp diskennet izel, paour-kêz merc'hed ! Dizenoret omp ha stiafet kuit a daoliou treid :


N'hon eus gwir ebet ken. Breset omp dindan an treid. Gwerzet omp d'ar wasa youlou direiz. O ! pebez nozveziou ! pa n'hellomp ket kousket, pa you'eomp, ha p'emañ ar maro euzus dirazomp bepred.

A ! Mamm ! ne fell ket d'in muioc'h glac'hari ho kalon. Ha koulskoude ne lavaran d'eo'h nemet eul lodennig eus hor poaniou. Plijet gant Doue sellet a druez, ouzomp-ni, paourkêz leanezed taolet kuit evel skubachou divalo, ha koulskoude, hor fiziañs a chom e Doue, hor c'harantez a zo d'ezañ, evit ma roio d'eomp ar c'hras da c'houzañv ar maro hir-mañ.


Ho paourkêz merc'h.
Troet gant V. Seité.

KANAOUENN evit ar SUL FASK


Marziale.



Kleier santel, it en dro sonit Al-le-lu-ia, p'eo savet eus ar maro



hor Salver hi-rio. Hi-rio Salver ar bed a zo resusit- tet O Kriste-



nien a vouez hor penn kanomp holl dezan da viken gant le-ve-nez hor c'harantez...

Kleier santel, it en dro :
Sonit, Alleluia !
P'eo savet eus ar maro
Hor Salver hirio.

Pa dremene war e groaz,
Ar bed holl strafuilhet
War e ahelou a grenas ;
Reier a frailhas.

Diskan :

Hirio, Salver ar Bed
A zo resusitet.
O kristeneien, a-bouez hor penn,
Kanomp holl d'ezañ da viken.
Gant levenez,
Hor c'harantez.

Kasit, Juzevien lorc'hus,
Kasit ho soudarded ;
Ne virint ket ouz Jezuz
Da sevel skedus.

Araok mervel, alies
En doa bet diskleriet :
Me 'savo leun a vuhez
D'an trede dervez.

Da sul fask, 'vel eur spered,
A-dreuz ar volz pounner,
Eo savet Salver ar Bed :
Gloar d'ezañ bepred !

A.C.

MOUEZ AN EÜRUSTED ?

Azezet eo an Tad koz e skeud ar c'harz a damouez bannou an heol-hañv, hag an êzennig o sourral a ra endro d'ezañ eun tammig freskadurez.

En he zav, en e gichen, e vere'h vihan a zell hag a zelaou. Sioul eo ar mêziou tro-dro.

— Klask a rez an eürusted, plac'hig ? Selaou e vouez har her c'havi.

— Hag e pelec'h, Tad koz, e klevin mouez an eürusted ?

— Gant pep hini eus ar grouadurien displed a gavi war da hent, merc'hig, te a c'hellou klevet mouez dudius an eürusted. Skañv eo ar vouez-ze evel hini an delienn a gren e beg ar skourr, ha mont a ra eün d'ar galon evel ar bann heol en ti dre ar prenestr. Kerz 'ta, plac'hig, kerz dre ar mêziou, ha te a glevou mouez an eürusted.

Hag ar vere'hig a gerz, tiz warni, mall ganti klevet mouez dispar an eürusted. Siouas ! Kaer he deus bale ha selaou, ne glev takenn ; mouez ebet ne zav da floura he c'halon. Ma tistro, doaniet, davit he zad koz.

— Tad koz, gwelet em eus ar waz o troidellat kamm-digamm etouez bleuniou ar prad. Hiboudi 'rae, klemmus. N'em eus ket komprenet he c'homzou.

Ar voc'hig-ruz a c'hournige, eun tammig plouz ganti d'ober he neiz.

Ar filip a deue da bikat ar bruzun a goueze diouz va zamm bara hag o c'hase d'e filiped bihan a zifrete laouen tre ma tostae o mamm outo.

Ar yar goz a c'halve he re vihan hag ez eant, d'ar red, da guzet dindan he diouaskell.

Ar gevridenn, neudenn ha neudenn a stigne he lasou, ha pa veze bet distreset he gwiadenn, e kroge raktal d'he dresa adarre.

Ar verienenn a gerze, d'ar piltrotig, eur c'heunenn winiz war he c'hein, pounneroc'h egeti.

Ar wenanenn a lamme eus eur fleurenn d'eben, a jomê eur pennad da zuna hag a 'z ae diwar-herr da gas he mel d'ar gestenn.

Ouz an holl loenedigou-ze em eus mousc'hoarzet, rak seblantout a raent d'in ez oant eürus. Outo holl em eus goulennet : pehini ac'hanoc'h a lavaro d'in e pelec'h emañ an eürusted ? oll int chomet mut. An hekleo hepken a responte : eürusted... eürusted...

— Mere'hig, fazia 'rez. Te eo n'ec'h eus ket klevet ar pezh a lavare d'it, en o yez, krouadurien Doue.

Selaou : ar waz a rede dre ar prad, o lakaat ar bleuniou da zavel, a lavare d'it eo ar vuhez eun tremen, hag ez eus levenez evit mab-den be-wech ma teu da hada ivez eur vleunenn war e hent evit laouenaat unan bennak.


Al labous a rae e neiz, ar verienenn a stleje eur winizenn, a lavare d'it eo al labour lezenn ar bed hag ez eus ivez eürusted e serr al labour p'her graer a galon vat.

Ar wenanenn o tastum mel evit holl gwenan ar gestenn, ar filip o rei beg d'e re vihan, ar yar o rei goudor d'he zorrard, a lavare d'it peger c'houek d'ar galon karout hag ober vad.

Ar gevridenn aketus da zresa he gwiad a lavare d'it, n'eus netra hep poan ha ne dleer morse fallgaloni.

Gouzañv gant pasianted, delc'her mat atao, kemeret fizians, karet ha sikour an nesa e serr ober e pep tra bolontez Doue : an eürusted, merc'hig n'emañ ket el lec'h all. Dre e grouadurien Doue hen desk da bep unan.

S. Santeg.



PASION HOR SALVER


Ton gant an
Ao. Goasdoue

Binviou Pasion hor Salver evel m'emaint hirio. (Cliché ar Vuhex Kristen)

Andante ... *Muzik gant ar Aotrou GOASDOUE, Kelenner e skolej Sant Josef. Lannuon.*



Ma Jezuz benniget, Piou n'deus holi ammet, gwasoc'h get eur mun-



-trer Gant chadennoù poun-ner? Me, Siouaz! dirz-naoudek d'ho poa-



niou zo ku-ru ek. Par-don o ma Doue, Ou-zin ho pet tru-e...

Ma Jezuz benniget
Gant fank ha krañj hudur?
Piou en deus mastaret
O tremm skedus ha pur
— Me siouaz... etc.

Ma Jezuz benniget
Piou en deus skourjezet
Ho korf, hoc'h izili
Ma n'int 'met eur gouli?

Ma Jezuz benniget
Piou en deus kurunet
Ho penn, ho tal edern
Hag o c'hilhet gant spenn?

Ma Jezuz benniget
Piou en deus ho sammet
Ha bloñset ho tiousoaz
Gant bec'h kalet ar Groaz?

Ma Jezuz benniget
Piou en deus don toullet
Gant an tachou houarn
Ho treid hag ho taouarn?

Ma Jezuz benniget
Piou en deus kinniget
D'ho tiweuz dem-varo
Ar vestl put ha c'hwero?

Ma Jezuz benniget
Piou en deus digoret
Gant eur gaaf didrue
Ho Kalon a Zoue?

Mabig Efflamm.

(Troet e brezoneg
diwar skridoù Sant Alfons.)

Imprimatur :
Sant-Brieg, deiz Merc'her al Ludo 1951.
BROCHEN, v. v.

Eun abadenn-studi e Brest

Lennet hoc'h eus bet, war ar journaliou, hon eus bet, e Brest, d'an 23 ha 24 et viz c'houevrer, eun abadenn-studi evit ar yaouankizou.

Klevet eo bet hor galv, pegwir eo bet heuliet hon abadenn gant ouspenn 130 paotr ha plac'h yaouank. Estreget ar re yaouank, avat, a zo bet dedennet gant ar studiou-se. Bez' ez oa ivez tud dimezet, beleien, leaned ha leanezed.

Eur blijadur e oa gwelet al levnez a fuc'he e skol Santez-Anna e-doug an daou zervez-se.

Pep tra, e gwirionez, a oa graet, evit lakaat laouen an dud. Sekretour meur ar *Bleun-Brug*, Visant Serré, n'en doa espernet nag e amzer, nag e boan, e-pad ar sizuniou arak, evit pourchas pep tra : « ti hag oz ha gwele da gouskat en noz ». Ret eo lavarout en deus kavet war e hent bolontez vat forz pegement e Santez-Anna, e Sant-Louis hag e Bon-Secours. Mil bennoz Doue d'ezo.

An abadenn a zigoras da deir eur gant eun taol biniou skiltrus, c'hoaricet gant « Paotred ar Flamm », war o binviou nevez flamm.

An Aotrou beleg Loeiz ar Feoc'h, skrivagner brudet ampart war bep tra, a zigoras an abadenn.

Dre e zoare-prezeg, a jestrou, mousc'hoarz laouen e zremm, e ouezas raktal lakaat e grog, ken braoik ha tra, war an holl selaouerien.

Komz a reas, hep skuiza den, eus danvez hor marvailhou koz. Konta' reas zoken meur a gontadenn, hag e lakeas ac'hanomp, evel eur gwir dad koz e korn an oaled, gwechou da dridal gant levnez, gwechou all da skrijal gant ar spont. Darn eus ar c'hontadennoù-se, dastumet e Bro-Wened a zo c'hoaz diembann.

War e lerc'h, goude eun taol-dañs, dindan renerez Jud ar Paboul, eur pabor mar deus unan da gas en-dro an dañsou, hon eus bet ar blijadur da glevet eur mestr all war ar c'hontadennoù : An Ao. chaloni Batany, person Sant-Vazé-Kemper.

E-pad eun eurvez leun, e talc'has an holl dindan dudi e gomzou. Lakaat a reas da vev dirazomp ar furcher m'eo bet Fanch an Uhel (Luzel), Boudedeo Breiz. Lakaat a reas keñver-ha-keñver ar c'hontadennoù-se, gant kontadennoù kosa ar bed, re an Indez dreist-holl. Mantret e chomer pa weler pegen heñvel eo chomet ar marvailhou-se deuet betek enniomp goude treuzi meur a vil bloaz ha tremen dre n'ouzer ket pet pobl.

An daouarn o strakal evel ar gurun, a ziskouezas d'an Ao. Batany pegement e plijas e brezegenn.

N'eus gwir abadenn blijadurus ebet, e Breiz, hep eur bom-kan, Setu perak e vo kanet meur a-wech, etre ar c'hoazeadennoù. Eur maout war ar c'han a zo bet dibabet evit-se : An Ao. beleg Goasdoue, rener laz-kana skolaj Lannuon.

Deski a reas d'an abadennerien eun toullad mat a ganaouennoù kaer, evel : « Gwin ar C'hallaoued » eus ar Barzaz Breiz, ken beo ha ken nerzus ; « Me zo ganet e-kreiz ar mor » ken fromus evel holl oberoù Kalloc'h toniet ken mat gant Jef Penven ; « Kemeromp an hent treuz » ken mibin, ken lirin ha ken brao : « Bannielou Lampaol », kaer ha meurdezus evel eur brosesion vras o tremen dirazoc'h, gant ar baotred o vanniela hag ar merc'hed teodou flour oc'h ober o dibab dre ma tremenont er vered, penn-da-benn d'ar vali...

Ouspenn ar soniou-se, ez eus bet desket meur a hini eus hor c'hantikou kaera. Kantikou, re alies, siouaz ! dilezet gant hor parrezioù.

Meur a wech e komzas c'hoaz an Ao. Floc'h eus danvez pinvidik hor c'hontadennoù, bep tro gant ar memes ampartiz.

B. de Parades a roas d'eomp da anaout al levrioù ma kaver enno ano eus hor c'hanaouennoù, dañsou ha kontadennoù. Diskouez a reas penaos e c'heller implija eur gontadenn evit ar c'hoariva. Ma karfent, ar patronajoù a gavfe uze danvez puilh evit o beilhadegou.

Ar film eo hirio, moarvat, ar beñveg modern ar pouezusa evit kelenn an dud. Ar *Bleun-Brug* a oar kement-se, ha setu perak hon eus roet, d'ar sadorñ goude koan, eun abadenn filmou, war hor gouelioù kaera : *Bleun-Brugou Keranna, Kastell-Paol ha Lokorn*, ha da heul daou film kaer : « *Pesketaerien bizin* » hag « *Elorn, Sterig vras* » gant *Per Kaouissin* bet d'ezañ ar priz kenta sevel filmou, en Naoned, nevez 'zo.

Hon abadenn-studi a zo bet boued fetis evit ar spered, met ivez evit an ene. An Ao. Floc'h, adarre, a ouezas rei d'eomp ar boued-se, da genta, dre eur brezegenn dispar war speredelez ar Vretoned hervez buhez Sant-Erwan ha Mikael an Nobletz : Ar Breton en deus eun doare santelezh hag eun doare santelaat d'ezañ e unan.

D'ar sul, e-pad an oferenn, e tiskouezas d'eomp al labour he deus Breiz da ober e tachenn an Iliz, hag e tachenn ar Bed : difenn ha lakaat da dalvezout personelezh an den monget muioc'h mui gant buhez an amzer vremañ. « Breiz diskaret, evel ma lavare Kalloec'h, eun tour, tan nebeutoc'h eo a vo war aodou ar C'hornog, evit ar Pobeloù da zont ; eur piled nebeutoc'h en Iliz katolik, eur steredenn nebeutoc'h war hent Betleem ha Rom ».

An Ao. chaloni Fave, aluzener-meur ar *Bleun-Brug*, hag an Ao. Gab ar Moal, prezidant, eo a glozo an abadenn.

« Klasket hon eus, eme an Ao. Fave, dizelei d'eoc'h eun disteraik teñzorioù dispar hor Breiz, rei d'eoc'h eun tañva eus kaerderioù hor Bro. It bremañ d'ar gêr gant an tañva-se, ha roit « lodig ar pardon » en-dro d'eoc'h dre ma 'z eoc'h. Ra zougo frouez, an abadenn-mañ, n'eo ket hepken ennoc'h, met en-dro d'eoc'h, en holl dud a zarempredoc'h. »

An Ao. Gab ar Moal, araok en em zispartia, a c'houlenn ma vo graet raktal eun dra bennak efedus. Penn-renerien strolladoù yaouankisou Brest, a ginnig en em voda ha sevel eur strollad « Mignoned ar *Bleun-Brug* » a sikouro sevel ha kas da benn gouel bras Plougerne da lun ar Pantekost a zeu.

Enoedon.

Abadennoù all. — Goulenn a reer diganeomp sevel abadennoù all heñvel ouz hini Brest, e meur a lec'h all, e Breiz : Roazon, Gwengamp, Douarnenez, Gwened. Ar pezh a c'hellimp a raomp. Met, allaz ! nag eo bras al labour ha bihan ar sikour ! Visant Seité, ar Sekretour a zo flastret dindan eur samm, bemdez pouneroc'h. Piau a roio sikour d'ezañ ?

KANT LUR AR BREZONEG

Eun den hepken en doa respontet e miz genver d'ar galv hor boa graet da vadelezh holl lennerien. Kalzik a re all o deus kaset d'eomp eur prof e miz c'hwevrer :

An Ao. Le Goff, an Doktor Regnault, an Ao. beleg Falc'hun, an Ao. Per Moçer, an Ao. Abarnou, an Ao. Noury, an Ao. Floc'h, al leanez Erwan-Vari a Jezuz, an Doktor Tricoire, an Ao. beleg Cong, an Ao. beleg Gloarec, an Ao. Le Gentil, an Ao. Chapalain, an Ao. Kerjean, an Doktor Colonne, an Ao. Ruban, an Ao. beleg Kalvez.

Ar roll a jom digor.

ABADENNOU SINEMA

Kendalc'h a reomp, hervez hon amzer hag ar goulennoù, da rei abadennoù sinema *Bleun-Brug* amañ hag ahont. Da genver meurlarjez omp bet e Lanniliz, Landivizio ha Lokronan. Film *Bleun-Brug Kastell* a zo bet ouspenn e Guiklann.

BLEUN-BRUG 1952

LANDREGER, 1, 2, 3 a viz eost : Savet eo da vat ar c'homite lokal ha renet eo gant an Ao. Savina, prezidant an S. I. Eun den eo hemañ hag a ra atao ouspenn ober an neuz pa grog en eul labour bennak.

En-dro d'ezañ en deus gouezet strolia an holl dud a volentez vat diouz kêr ha diwar-dro.

Eur c'homite a enor emañ bremañ o sevel renet gant an Ao. René Pleven, ennañ dija eskibien, personed, ministred, senedourien, deputeed, kuzulierien-veur, Maered, Alvokaded, Barnerien...

D'an 9 diweza e-doug eur vodadenn e Landreger eo bet barnet ar skritelloù. 78 a oa bet resevet. Eun tamm brao a labour eo bet evesaat ouz pep hini.

Met na pebez labour plijus ! Biskoaz, marteze, n'eo bet sant Erwan muioc'h enoret, dre gement liou a zo. Ar skritell-mañ a veul e lealded, eben e garantez evit e nesa, eben all e furnez, e ouiziegez, e izelegez...

Ar maout a zo bet aet gant René Pavec eus Douarnenez : 20.000 lur a c'hounit. E-doug an hañv mogerioù Breiz a gano meuleudi tad ar beorien a c'halvo an holl da *Bleun-Brug Landreger*.

PLOUGERNE, 2 a viz Even : Mont a ra diroufenn kaer pep tra. Leoniz a felle d'ezo e ve *Bleun-Brug Plougerne* eun enor dispar da Vikael an Nobletz, abostol bras Breiz-Izel.

Bec'h a zo dija war ar c'hoarierien o labourat war o fezioù c'hoari. Daoust ha trec'h e vo Lanniliz da Blougerne ? Paotred ar Groaneg avat, a lavar int gouest da zibrada ar maout. Gwelet e vo.

Ar skolioù a zo ivez a-zevri o pourchas o c'henstrivadegoù. E-pad vakansou meur-larjez e veze ar Seurezed oc'h ober skol vrezonek an eil d'eben, evit beza gouestoc'h da bourchas ar yugale.

Met ar c'haera 'vo eo an abadenn vras a vo roet dirak ar mor, e Sant-Mikael : eno e vo strolladoù kanerien en ha kanerezed, gwella danserien Leon ha Kerne, sonerien ha tabourinieren, dilhajoù kaer, c'hoarierien dispar hag eur brosesion evel n'ez eus bet gwelet biskoaz. Pedet eo dija holl barrezioù Leon da zont ha kalz a-benn bremañ o deus respontet e teuint gant o dilhajoù kaera, kroazioù ha bannieloù.

PONT-E-KROAZ 18 a viz Mae : Ar Werc'hez eo a vo enoret amañ ha n'eo ket ober an neuz eo a vo graet. Pet Gwerc'hez a zeuio ? Diaes eo lavarout, evit c'hoaz. Gwerc'hez ar C'hap, evel-just, a zo dija prest da loc'h.

Pont-e-Kroaz a vo eur « mor a gan » d'an 18 a viz Mae. Kanerien ar c'hloerdi-bihan a zo krog mat dija da floura o mouez. Ne vezint ket o unan. War a goner, Sant-Vaze Kemper, bet d'ez dija diou wech diouz renk kenta priz ar *Bleun-Brug*, a vo ivez er Pont, ha Gourlizon ivez, ha Skaer, ha re all...

Dudi a vo d'an diskouarn, ha dudi c'hoaz d'an daoulagad ; Aze e vo gwis-kamantou kaera Bro-Gerne : Kele'hioù Pouldreuzic, Pouldergat, Douarnenez, Lokorn, Kerfeunteun, Kastellin ha Nevez... a zo dija war ar renk.

Evel kêr Jeruzalem gant trompetoù Josue, bralla 'rei war o diazez mogerioù koz ar Pont, gant sonerien Kastellin, Douarnenez ha Kemper.

Ar skolioù ivez, diwar-dro ar Pont, a labour kemend-all. Gwelet e vo ha gouest eo Kerneviz vihan da drec'hi bugale Leon war ar c'han hag ar c'honta e brezoneg.

BAUD, 5 a viz Gouere : Gwenediz a labour ivez, en o gwir wella. Eul lec'h kaer eo Baod, nepell diouz Keranna, leun a c'halsvez hag a gan. Kaer e vo beza eno d'ar 5 a viz Gouere. An holl Gwerc'hez, o tougen an ano kaer a « Sklaerded » a zeuio en deiz-se da belerina da Vaod el lec'h m'eo rouanez Itron Varia ar « Sklaerded ».

Goulenn a raimp diganti ma lugerno splann war Vreiz sklerded ar wirionez, ar peoc'h, al lealded hag ar garantez.

Bleun-Brug Baod a vo eun hekleo laouen eus *Bleun-Brug* Keranna, evel eur vleunienn gaer dinodet flamm war *Bleun-Brug* 1951.

BLEUN-BRUG BREIZ-UHEL

Abaoe pell 'zo e klemme Breiz-Uheliz dre ma ne rae netra ar *Bleun-Brug*, en o bro.

« Je dois vous avouer, a lavar d'in eur Breiz-Uhelad, M. R. eus St-Malo, que j'ai été déçu un peu par le *Bleun-Brug*, car, lui aussi agit et travaille pour la Basse-Bretagne et ignore pratiquement tout de la Haute-Bretagne. Je suis du Haut-Pays, et défends ma région. Elle est aussi digne d'intérêt que la vôtre, quoiqu'elle ait subi plus profondément l'influence normande ou française. Mais il faut bien le dire nous avons l'air d'être laissés de côté et nous ne sommes que très faiblement aidés par les mouvements culturels ou folkloriques bretons. Evidemment, je vois mal un *Bleun-Brug* à St-Malo, qui pourrait écouter les orateurs bretons ? Les bretonnants sont rares dans ce pays. Mais il serait tout de même possible dans le type des petits congrès de monter un *Bleun-Brug* en Haute-Bretagne... »

Setu mouez Breiz-Uhel. Dre holl emañ ar Vretoned o tihuna. Dre holl emañ brud ar *Bleun-Brug* o redek. An holl o deus o daoulagad warnañ evel war eur steredenn a silvidigez a harpo ouz gened hor Breiz d'en em goll da viken e mor disliv ha diene ar « Bed modern ».

Aotrou 'n Eskop an Naoned, dija, e Kastell-Paol, en doa goulennet ar *Bleun-Brug*. Klevet eo bet e vouez, hag er bloaz-mañ, d'an 8 a viz Even, e vo lidet *Bleun-Brug Breiz-Uhel*, e Gwenrann (Guérande).

Perak e Gwenrann ? Er c'hornig-bro-se, n'eus ket pell c'hoaz, e veze komezt brezoneg.

E-kichen, e bourg Batz, e lenner c'hoaz war tiez a zo, skritelloù brezonek, kizellet er vein, evel : « ty butun mat ». Eno ivez e weler c'hoaz dismantrou eur manati koz bet savet gant menec'h Landevenneg.

E Gwenrann eo en deus bet Kermarker, oberour ar Barzaz-Breiz, graet darn eus e studioù, ha setu perak e vo graet *Bleun-Brug* Gwenrann en enor d'ar Barzaz-Breiz.

Er c'horn-bro-se ivez, ez eus Kelc'hiou keltiek beo ha breizek kenañ. Paluderien Saillé, bro an hollen, a weler bep bloaz en hor *Bleun-Brug*ou, gant o zokou ledan hag o dilhajou flamm.

Ar *Bleun-Bruger*.

AN IBIL

EUR wech e oa eun ozac'h pinvidik, v'hoant d'ezañ da zimezi e vere'h koant. Gervel a reas tri baotr da zont davetañ unan eus ar gomepezenn, unan eus ar c'hoad, unan eus ar menez : « Grit peb a ibil emezañ, hag hen degasot warc'hoaz d'in. D'an hini en devozo graet ar gwella, me a roio va merc'h da bried. »

Antronoz, setu int, o zri, o tont endro. Paotr ar gomepezenn a ziskouez, e labour : « Ro deo eo, eme an ozac'h, ha graet gant prenn glas. Ret e vije bet ober gant prenn sec'h ; kea kuit. Ne vezo ket va merc'h d'it. »

Paotr ar c'hoad a zeu goude : « Madig eo, eme an ozac'h, nemet eun tamm re voan evit an dra ma fell d'in ; kea kuit ! Ne vezo ket va merc'h d'it. » — « Ha te ? » a lavaras an ozac'h d'an trede, ar Meneziad, « Perak e chomez hep diskouez da ibil ? » — « N'em eus graet ibil ebet. » — N'ac'h eus ket graet ? Ha perak ? — « Sonjet em eus ennoun va unan : da genta, ez eo ret sellout ouz an toul. » — « Mat-tre, eur spered kaer a baotr a zo a'hanout ! D'it-te va merc'h. »

MARVATILH EUS BRO ARVERN.

(Tennet ha troet a-zhoar « Les Etudes » (Mévevenn 1944) gant an Eil-Amiral Laurent.)

EUR C'HAÑV MANTRUS

Miz c'hwevrer en deus skoet eun taoel garo ha didruez gant ar *Bleun-Brug* hag ar brezoneg : maro eo ar C'habiten Roperz ar Mason, d'an oad a 52 vloaz, pa oa e soñj rei d'eomp c'hoaz meur a leor kaer. Ganet e 1900, en eur familh gallek, Roperz ar Mason a zeskas gredus hor yez hag e zeuas da veza unañ eus hor barzed vrasa ; evel Kallôc'h, e brezoneg Gwened eo e skrivas, hag evel Kallôc'h, e lakaas en e oberennou eun adsked eus buhez e ene. Daou vloaz 'zo e voe embannet gantañ eur romant kaer-meurbet. Ouzpenn-se, an Ao. ar Mason a skrivas e brezonek kalz pennadoù a filozofiezh kristen. Skoa-zella a reas bepred ar *Bleun-Brug* ha warlene, e gouelioù Keranna, e tisplegas eur brezegenn dalvoudus diwar-benn Yann Ber Galloc'h, ar barz kristen a gare kement, hag a voe ken heñvel outañ.

Gant gwir c'hlaç'har eo deuet betek ennomp kelou mantrus e varo. E vuhez avat a chomo eur skouer evidomp ; Doue hag en deus tennet enezañ eus hon touez a lakaio c'hoaz da ziwan en hor Breiz kalz tud a ouestlo o buhez d'ar feiz ha d'ar vro.

D'e bried ha d'e vugale, ar *Bleun-Brug* a ginnig e c'hourc'hemennou a gañv hag a laka eun oferenn evitañ.

E koun ar barz kristen ha breizat, e kinnigomp d'hon lennerien ar barzoneg-mañ bet savet gantañ.

OFERENN WAR VOURZ

Ha mont a reont 'velse
Hep aon en noz-teñval...
(KALLÔC'H.)

Pa 'z eo gwir emañ war va lestr	Nec'hañset biken ne vimp mui
Ar mestr kenta en ho koude,	Pegwir 'maoc'h aze va Doue !
Pa yud an avel digabestr	
E klasker nerz em sellou-me.	En dreuzell, war daol ar gartenn,
	Emañ laket maen an Aoter.
Ha lies, daoust d'am c'homzou start.	An holl ha kron hag ar bedenn
Vel Per war al lenn gwecharall,	A sao, gant an avel, en êr...
E c'houlennan, sturier ampart,	
Hoc'h ali fur barz an noz dall...	En ouf, tro da chadenn an eor,
	En em vrasell goustad, va lestr.
Er mintin-mañ ez oc'h deut-c'houi	Ho luskellat a ra ar mor,
Da chom ganimp war yourz ive.	Roue an islonk, Jezuz hor Mestr !

Roperh er Masson, 1942.

Diwar Bro-Gwened, 1-52

Kañvou c'hoaz.

Deuet eo d'eomp ivez kelou glac'harus maro an Ao. Floc'h noter e Pontreo (C.-du-N.). Tad e oa da Vaodez Glanndour hon aluzener ha kenlabourer. Da geñver ar c'hañv-se her pedomp da zigemer hor gourc'hemennou a gañv. Eun oferenn hon eus laketa evit e anaon e iliz Santez Ann Wened.

Kelou a zeu d'eomp c'hoaz eus maro Emil Cuef, kaner Leon, anavezet mat gant an holl. Meulet en deus Breiz gant e vouez dispar e kement gouel a zo bet. En Neñv, sur omp, e kendale'ho da gana meuleudi ar Vretoned. Plijet gant e wreg hag e vugale digemer hor gourc'hemennou a gañv.

AR BREZONEG ER SKOL

KLOU a zo deuet d'eomp eus ar brezoneg e kloerdi-bihan Santez-Anna-Wened.

Abaoe pell 'zo e reer brezoneg er skolaj-mañ. Betek ar bloaz 1929 e veze kelennet en holl glasou. En abeg d'an ekzaminou, ne vez graet mui nag er c'hlas kenta nag en eil.

D'ar mare-mañ e reer brezoneg eta azalek ar 6 vet, betek an trede klas.

E pep klas, ar vugale a vez graet anezo diou lodenn evit ar gentel vrezonek : ar re a oar brezoneg hag ar re n'ouzont ket. Peurvuia e vez kement ha kement e pep lodenn. Da bep lodenn, pep hini diouz he zu, e reer eun eur skol vrezonek bep sizun. Er-maez eus an eurvez-se, e roer d'ezo, ouspenn, deveriou evit eun eur hanter a labour.

Laket eo ar gentel vrezonek war ar memes renk gant ar c'henteliou all; notet e vez an deveriou-se, hag ar poenchou anezo a gont.

Bep tri miz e vez roet eur genstrivadenn (composition) vrezonek dre skrid ha dre gomz hag a gont evit gounit ar priz a enor da fin ar bloaz skol.

Er 6 vet hag er 5 vet e reer dreist-holl troidigeziou ; er pevare hag en trede, displegadennou dre skrid. Darn eus ar vugale a skriv braoik ar brezoneg a-benn ma vez echu ganto o studi.

Al levriou implijet eo re « Guillevic » et « Le Goff », gant yezadur an ao. chaloni Mary, hag ivez al levrig « skol » an ao. Marouille. Evel-just e vez kelennet d'ezo ivez ar « Barzaz Breiz » hag oberou Yann-Ber Kallo'h.

Alies a-walc'h, e-doug ar c'henteliou, e vez kanet kanaouennou brezonek, dreist-holl diwar al levr « Kañnam bugale » gant an ao. Lohier.

An holl a oar, ez eus e skolaj Keranna eul laz-kana-brudet, renet gant an aotrou Derian. Gouezet en deus hemañ, sank a kalon ar vugale eur garantez vras evit ar muzik hag ar c'han brezonek, kanaouennou ha kantikou.

E-doug an ofisou santel, ar pardoniou, ar prosesionou, e klever eta, alies, kantikou kaer eskopti Gwened.

Kanerien Santez-Anna a blij d'ezo ivez ar c'hanaouennou poblek. O c'hana a reont a-gleiz hag a-zehou, kendoniet gant sonourien vrudet evel « Carraz », kelenner e skol-gonerez Genève, Jef ar Penven, ha Maillart-Verger.

Meuleudi da Gloerdi-Bihan Keranna evit al labour vat a ra war dachenn Vreiz. Peur e vo heuliet e skouer gant holl skolajou Breiz-Izel ?

LE PARADIS BRETON

Eun nebeut 'zo, war « La Croix du Dimanche » e weler kalz brud diwar-benn eul levr all, hemañ e galleg : « Le Paradis Breton ».

Eul levr dispar eo hemañ, evit ar vugale, ennañ skridoù ha taolennou dudius eus buhez hor sent koz. Savet eo ar skridoù gant Janig Corlay, pried hor mignon mat Herri Caouissin. Lenne a reer war ar bajenn genta, eur raklavar kaer gant an Tad Colliot abad Landévennec.

Evit kaout al levr, skriva da : Maison de la Bonne Presse, rue Bayard, Paris. Priz 525 lur.


Réponchou divinadennoù miz C'houevrer :

1 : Hoc'h ha gwiz — 2 : Hon oad — 3 : Sevel egile.

PAJENN AR VUGALE

Son ar gevier


Biskoaz ne c'hoarzis kemend-all
Evel am boa graet en deiz all !




O welet ar bleiz o prena per...



Hag al louarn o werza yér.



Me 'm eus gwelet eun ouner vloaz
A zouge Kemper war he skoaz,




Brest ha Rekourans war he lost
Ha c'hoaz ez ae ganto d'ar post.

Me 'm eus gwelet eun ouner vriz
O kas ar bed-mañ war e giz.

Me 'm eus gwelet eun ouner zall
O kas ar bed-mañ d'ar bed all.

Le Gérant : Abbé BLEUVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER IMP. CORNOUAILLAISE



Cliché Ar Vuhez Kristen

An Aotrou Jezuz a zo beo.
Gwelet eo bet e-tal ar c'heo
Savet eo a varo da veo
Alleluia !